

Dastumad Pennwern : dornskrid 90

## 129. ITTRON AR FAOUET

( folленнou 114-115 )

Mar renkan mond d'an arme evel ma zon c'hoas bed  
Pelec'h e lakin-me va mestrez da viret ?

- Digassi-din dam zi, va breurik, mar kerez,  
a me e lakeñ er kramp gant va demezellet.

Na voa ked eed mad e zaou droad d'eus an ti  
ma komansont oll da kana pouill dezi.

- it-tu breman d'all lan da zivoël an denvet  
Da c'hortez ma distrei o briet deus an arme.

Pa voa bed seiz vlaz el lan ne re nemet voëlla  
Deud an eisved blacuez e komansas kana.

an dijentil iaouank o distrei deus an arme  
a kleve eur vouez dous o kana er mene.

- Pachik, pachik bien, dalc'h din va inkane  
Me chonj din e klevan va mestrez o kana.

- Debonjour, plac'h iaouank, el lan gant o tenvet  
A c'houi elfe aze konservi o gwertet ?

- Ia sur, emezi, a dre c'hras va Doue,  
D'eun dichentil iaouank a meus ed d'an arme.

Evid-on da vez a el lan gant va denvet  
Me zo eun itron gaërl a vaner ar Faouet,

hag a zo eiz vla zo o tivouel an denvet  
en eur memeus kraou gato e renkan me kousket.

el laouerik ar c'hi e meus va zamik bouet.

+ + + +

- 118 -

- Debonjour a joa **a** lavaran er ...  
er maner ar Faouet pa erruan  
na va vriet pellec'h **e** man ?

- ead **e** da bournen gant va demezellet.  
Breman soudan vatant, va breurik **e** goëlllet.

- penevit **e** respeti ti va mam a va zad  
Me lakafe leur ha ti da rucha gant ta oad.

En eur vond **e** meus hi renkontret  
Ag **e** teus hi lakeed  
da zivouel da servet.

vvvvvvvvvvvv

Catherine Le Borgne, 3 mars 1851

vvvvvvvvvvvv